

Cholori

N^o 10

11^L



Kazetenn viziek evit ar vugale . miz gwengolo 1984 .
n^o 155 m . 0760-1095


Ne vo ket mui kavet Piltrot e-barzh CHOLORI, maiv eo e dad,
 hor mignon ERWAN KERVELLA, d'an 9 a viz gouere, e Lannuon.
 Gouelet kalz en deus Piltrot. Hir-soñj a zalc'himp holl
 anezhañ, ken diaes ha Piltrot hon eus kavet.

Taolenn :


- p.2 a bik da bik
- p.3 Piltrot
- p.4 ar skeudenn guzh
- p.5 selaou, selaou !
- p.6 John ha Jessie
- p.7-8-9-10 an droiad vras
- p.11 foar ar mouar
- p.12-13 ar c'hoz
- p.14-15 c'hoari


Savet eo bet
 an niverenn-mañ
 gant :

- Michèle BEYER
- Marivon BERR
- Erwan KERVELLA
- Lukian KERGOAT
- Martial MENARD
- Agnès SIMON
- Daniel DOUJET



o vont a bik
 da bik...







du + gwer i setu unan a zo aet da guzhat
 ruz - glas o kemer da greionoù
 orañjez • da c'houzout petra emañ och ober !
 melen ◻ (gellout a ri neuze ober eveltañ)




selaou, selaou
me glev trouz

ar veilh vihan
o valañ plouz




ar veilh vras
o valañ hei'


ar goukou vihan
o kanañ de'i



Vakansoù start evit
John ha Jessie LITTLEDOG!



sikourit anezhe !
lakait en urzh
lizherennoù ar
Panneloù - hent .
THANK YOU !




An Droidad Vras

Ar velc'hwedenn-grogennek a gendalc'h gant he zroidad
war gein ar goulenn wenn.

C'hwezhañ a galon vat 'ra an Aotrou Forseuseth.

Ha setu int o-daou o treuziñ morioù ha douaroù dianav.



A-daol-trumm e chom dianal an Aotrou Forseuseth.
Tamm mouch-avel ebet ken !






Diskennomp
da welet ar vro
peogwir omp sac'het amañ!

A-hed ur bann heol he deus ruzet ar velc'hwedenn-grogennek.




Olala !
Tomm eo amañ 'vat !
ha sec'h an traezh !

Del !
Petra eo an dra-se ?
Turiadennoù gozed, marteze ?




Opala ! Faziet 'm eus, soñj din !
Gwelloc'h 'vefe diskenn buan !

Ouuiouou ! Adarre !
Ola, ar goumoulen !
Ur skeul, mar plij,
ha fonnus !!!



Sshhh Sshhh Sshhh

Ken sec'h eo an amzer er gouezlec'h-mañ m'he deus kroget ar goumoulen
 da zisec'han. Mont a ra war vihannaat, war strishaat !!
 Poent eo stagañ ganti, Aotou Forseuseth !



Sell 'ta koumoulen,
 War-zu an heol !

Un oasis-saladenn !
 Hast afo !

Siwazh dit, paourkaezh !
 Un touellwel n'eo ken !

Dipitet-bras e voe ar vel'hwedenn-grogennek gant gouezlec'h ar
 Sahara,
 ha treutoc'h-treut he c'hofig. Pedif a reas an avel da cheñch tu
 adarre.
 Ha kavout a raio erfin ur vro diouzh he c'hoant ha boued mat d'he
 beg lipous ?

Da vezañ kendalc'het..



Foar ar mouar
 ★ War al loar
 Graet em eus gant boestoù-mir
 Ur fuzeeñ Fin 'vel ur bir
 ★ Gwelet em eus :

★ War vord an hent
 ★ En oabl divent
 Stered yaouank o choari biz-meud
 Lufus o fenn ha du o skeud

ar c'hoz ,loen touller

Ul loenig du, pivier roz dezhañ, o tiskouez e fri lemm war ur bernig douar. Setu ar c'hoz, pe ar goz, evel ma lavarer ivez. N'ho po ket tro avat, d'he gwelet alies e-giz-se, o tiskouez he blev du dindan lagad an heol. Damani ar c'hoz zo dindan an douar. Pa 'z eot da vale war ar maez e c'hellot gwelet bernouigoù douar o sevel er parkeier. E-barzh al liorzhoù e vez gwelet ivez. Ar c'hoz an hini he deus berniet douar evel-se, o kas an douar er-maez pa vez-hi o toullañ he garidennoù. Turiadennoù gozed a vez graet eus se.

Ar c'hoz eo al loen nemetañ en hor bro na vev nemet dindan an douar. Toullañ a ra he garidennoù 15 cm dindan gorre an douar war un dachenn en deus war-dro 800 m² gorread. En un devezh-arat e c'heller kavout betek 10 goz. E-kreiz ar rouedad garidennoù-mañ emañ kastell an Itron Goz : un toull hirront e-lec'h ma teu da ziskuizhañ. Pallenmet eo gant delioù ha geot. Alese ez a kuit an holl c'haridennoù. Implijet e vez ar re-se evit ar chase. Ur chaseour didruez eo ar c'hoz abalamour d'he c'hof don ! Kement hag an hanter eus he fouez a ya ganti bemdez; buzhug dreist-holl a ya d'ober he boued met ne ra ket fae war ar melc'hwed, ar maligorned pe ar preñved gwenn. Gwech an amzer e tebr ivez ur ranig vihan pe ur minoc'h, pebezhanvez neuze ! Pa vez fonnus ar boued e tastum pourveziou e-barzh toulloù : betel 1280 preñv zo bet kontet evel-se, e-barzh un toull, berniet eno gant ar memes goz !

Ar barez, hi, a ra un toull all a dalvezo da neizh. 4 sizhunvezh e vez douget he re vihan ganti ha 4 goz vihan he deus. A-wechoù muioc'h pe nebeutoc'h - 2 da vihanañ, 7 d'ar muiañ - ha ne c'han nemet ur c'hlodad bep bloaz.

12



turiadenn ha garidennoù ar c'hoz.



diaso-bras eo d'ar gozed berrewel gouzañ an heol. lannoù an heol.

Ar c'hoz n'he deus ket kalz a enebourien. Al louarn, ar gaerell, ar c'hi a zebr un toulladig anezho. Ar gaoenn avat, a zebr kalz muioc'h eus ar re a vev e douar ar c'hoadoù.

Gwechall e veze graet ar chase d'ar gozed rak priziet e oa o c'hroc'h'en : mantilli a veze graet gantañ. Tud a oa o micher chaseal gozed : gozetaerien a raed anezho. Pakañ a raent ar gozed gant ur meni trap anvet gozunell. Bremañ avat, e vez lezet e peoc'h kroc'h'en al loenedigoù dinoaz-se. N'eus mui nemet al liorzhour a ya e fulor ruz pa wel un duriadenn e-kreiz e bengennad bleunioù.

Pivier : liester pav

Garidenn*:(-où) : toulloù, hentoù krouizet dindan an douar gant ar gozed.

Minoc'h*:(-ed) : seurt logodenn hir a fri (musaraigne)


Klodad*:(-où) : torad (où)

Pengennad*:(-où) : renkennad*, ervennad* (où).



7 	6 	5 	4 	3 	2 It buan betek ar 25 !
8 	21 	20 Chomit amañ e-pad un droiad	19 	18 	
9 	22 	27 PAL	26 Distroit betek an 13	17 	
10 	23 	24 	25 	16 	
11 Distroit betek an 3 !	12 	13 	14 	15 It buan betek an 21 !	

c'hoari al logodenn




C'hoariet e vez gant difsoù ha pep c'hoarier en deus ur pezh a gaso war-raok diouzh niver ar poentoù merket war an daou ziñs. Ar pezh-se a c'hell bezañ ur bont troc'het pe ur vilienn vihan.


An hini kentañ degouezhet gant ar garrezenn 27, ar pal, hemañ en devo gounezet !

LENNIT MAT AR REOLENNOU

- Pa vez tennet 5 gant an difsoù ez eo ret kilañ 5 karrezenn.
- Mar kouezhit war ar garrezenn 9, it' diouzhtu d'an 20.
- Pa gouezhit war ar c'harrezennoù 3, 13, pe 21 e c'hellit teurel an difsoù en-dro.
- Pa gouezhit war un tamm fourmaj e chomit hep c'hoari e-pad un droiad.
- Pa gouezhit war ur c'hazh, distroit d'an 1.
- Pa gouezhit war ar maligorn pe an askorn e c'hellit mont dreist ur garrezenn.
- Diwall d'al labous ! Gant hemañ e vi debret ha lakaet er-maez eus ar c'hoariadenn
- Gant an naer e vi debret ivez, nemet m'az pije tennet 6.



buhez kuzh ar gozed :



KOUMANANTIT DA CHOLORI !!!

120 L ar bloavezh - 70 L ar 6 miz.

100 L adal an eil koumanant.

Kasit priz ho koumanant da :

Agnes SIMON, Krec'hienn, Plouider,
29260 LESNEVEN.

Gant ur chekenn graet en anv AN HERE

Nnn ISSN : 0760 - 1085

Nnn CPPAP : Da zont war-lerc'h

Renerez ar gazetenn: Joëlle PERROT.

Moulet e ti g/Cloître Gourhent N12

St Thonan 29220 LANDERNE.



AN HERE